

ANN HINI GOZ

HAG ANN HINI IAOUANK

PE BREIZ HA BRO-C'HALL.

Ann hini gouz
Eo ma dous ;
Ann hini gouz
Eo zur !



Ha kouskoude, war a welan,
Ann hini iaouank ar vravan.
Ann hini gouz, etc.

Ann hini iaouank a zo koant ;
Ann hini gouz e deuz arc'hant ;
Ann hini gouz, etc.

Me n'ez ann morse d'ar marc'had
Na ro d'i-me gwerz boutaillad ;
Ann hini gouz, etc.

Ann hini gouz am c'hundu mad ;
Ann hini gouz a zo d'am grad.
Ann hini gouz, etc.

Ha kouskoude ebarz e ker
Ann hini iaouank a garer :
Ann hini gouz, etc.

Ann hini iaouank zo ker plomm !
Ann hini gouz zo 'n tammik kromm.
Ann hini gouz, etc.

Ann hini iaouank zo lijer ;
Ann hini gouz a zo pouner ;
Ann hini gouz, etc.

— 2 —

Ann hini gouz e deuz bleo gwenn ;
 Ann hini iaouank bleo melen.
 Ann hini gouz, etc.

Ann hini gouz liou raden zec'h ;
 Ann hini iaouank liou ann erc'h ;
 Ann hini gouz, etc.

Liou ann erc'h eo, hng hi ker iou,
 Na ra gozik eur zell ouz-en !
 Ann hini gouz, etc.

Ha kouskoude n'ouzon perak
 Ma c'halon ra tik-tak, tik-tak.
 Ann hini gouz, etc.

Tik-tak a ra ma c'halon baour
 Pa 'z ann da skei war doull ann our.
 Ann hini gouz, etc.

Tec'h alese ! tec'h kuit ! tec'h pelli !
 Ann hini gouz a zo kant gwell !
 Ann hini gouz, etc.

Ann hini gouz a zo kant gwell ;
 N'e ra ket taillou demezel ;
 Ann hini gouz, etc.

Diaked ann demezelled,
 Diaked e tri rann ar bed.
 Ann hini gouz, etc.

Demezelled na reont nepred
 Nemet goab ouz ar Vretoned.
 Ann hini gouz, etc.

Pa dolann dorn war benn he glin,
 Ann hini gouz a c'hoarz ouz-in.
 Ann hini gouz, etc.

Ann hini gouz zo Bretonez,
 Ann hini iaouank zo Gallez.
 Ann hini gouz, etc.

— 3 —

Fao eo gan-in gand ar Gall brein,
Gant kroc'hen ann diaouj war he geiu !
Ann hini gouz, etc.

Fao eo gan-in gand ar Challez ;
Gant-hi karnou enn he botez !
Ann hini gouz, etc.

Goude tri deiz e skuiz pep' den
Gant glao, avel ha merc'h estren.
Ann hini gouz, etc.

Mar komzet a vriedelez
Komzet d'in euz ar Vretonez.
Ann hini gouz, etc.

Ne lakinn van pa vo laret
Eo ar Vretonez groac'hellet ;
Ann hini gouz, etc.

Evit-han da vont groac'hellet,
Ann aval blaz fall n'en deuz ket.
Ann hini gouz, etc.

Bezet drouk gant neb a garo,
Troc'het ann ed, dornet e vo.
Ann hini gouz, etc.

Bezet drouk gand neb a garo.
Ma dous ha me m'eurevjo ;
Ann hini gouz, etc.

Ni gousko eun eur gwele kloz,
War ar pell fresk, bemnoz, bemnoz ;
Ann hini gouz, etc.

Na pa ve ker kouz hag ar bed,
Gan-in e vez o gwalennet !

Ann hini gouz
Eo ma dous,
Ann hini gouz
Eo zur !

